

**M**or Bihan Gwened tolpad zo  
un tachad hag a zesach kalz a  
dud davetañ, a dolp 34 c'humun, get  
Gwened da gêr-benn hag a c'hronn Mor  
Bihan Gwened, get ur boblañs oc'hpenn  
170 000 a dud.

Setu berr-ha-berr petra a lârer evit roiñ  
da anavouet hon etrekumunelezh.

Diàr vremañ, evit he zermeniñ gwell,  
e c'hellimp oc'hpenniñ he « 1000 km  
a vinotennou-bale ».

Kalz a bleustr a vez àr an hentoù-bale-  
se ken ma ta da vout ur c'hiz nevez er  
gevredigezh.

Bec'h o deus laket dilennidi an tolpad-  
kêrioù evit brudiñ o c'hornad dre  
an diverrañs-se, sport ha sevenadur  
àr un dro, ha mat-tre evit ar yec'hed.

Mor Bihan Gwened tolpad a genlabour  
get ar c'humunioù evit kempenn ha  
balizeniñ ar minotennou, a-gevret get  
ar c'hevredigezhioù baleerion, ar Rann-  
vro, ar Park natur rannvroel...

Ul lec'h dibar ha c'hoantaet eo hon  
tolpad a-gaoz d'e zremmvroioù liesseurt  
àr an aod, en inizi, e kêr hag àr ar mae-  
zoù, d'al loened ha d'ar plant ag ar choaz,  
d'ar glad e stad vrav.

Degas a ran da soñj d'an dud alies :  
dav eo dimp gouiet gouarniñ ar buil-  
hentez-se, ken bresk, taolomp pled,



© J.F. Guillen

bezomp pervezh hag evezhieki doc'h  
ar mod ma vez darempredet Douar  
Gwened. Diwallomp a vont re bell geti  
evit ma c'hellimp mirout ar glad naturel  
dibar-se e-pad pell.

Hañvad kaer deoc'h-razh.

**Pierre Le Bodo,**  
**Prezidant Mor Bihan Gwened tolpad**